



Kargad-ez a gehentiñ

Kinnig labour embannet d'an / ar jeudi 11 septembre 2025

Lec'h : **Landerne**

Doare post **CDI** H/F

Kerkent ha posubl

Deskrivadur ar post-labour

Emañ Diwan o skoliata milieroù a skolidi e brezhoneg a-drugarez d'ur rouedad skolioù, skolañoù ha liseoù, ennañ skipailhoù mennet ha tud a-youl vat e Breizh a-bezh. Asambles gant ar renerezh hag ar burev e savoc'h hag e lakait e pleustr ur steuñv kehentiñ diabarzh ha diavaez evit :

Kemer perzh e talvoudekaat skeudenn ha brud Diwan ;
Aesaat lusk a c'heleier er rouedad a-bezh ;
Engverl ar familhoù, an dud a-youl vat hag ar brofourien ;
Brudañ ar mesenerezh hag ar c'hevelerezhioù ;
Ober war-dro en enskrivadurioù betek al lise ;
Kreñvaat an darempredoù hag ar c'henstagañ er c'hevread.

Ho kefridioù pennañ

1) Kehentiñ diabarzh

Sevel ha skignañ ar skoroù (lizhiri-kelaouiñ, intranet, postelioù) ;
Buzehiñ ur rouedad tud oberiant (gopridi-adezed, tud a-youl vat) ;
Harpañ aozadur ha talvoudekadur prantadoù buhez ar c'hevread (emvod meur, devezhioù eskemm, kuzulioù skol) ;
Skignañ ha diellaouiñ an teulioù ofisiel.

2) Kehentiñ diavaez & darempredoù mediaoù

Kemer perzh e krouiñ ur skeudenn positivel ha brud vat ar c'hevread ;
Sevel/skignañ kemennadennoù ha teulioù ; aozañ prezegennoù ha pennadoù-kaoz ;
Merañ ur rouedad kazetennerien, levezonerien ha kevelerien emsavadurioù ;
Talvoudekaat oberoù ar skolioù/skolañoù/liseoù hag ar c'huzulioù skoazell.

3) Kehentiñ niverel

Buheziñ ha bremanaat al lec'hienn internet hag intranet ;
Merañ ar rouedadoù sokial (linenn stur, buheziñ, habaskaat, danevellañ) ;
Krouiñ danvez liesvedia (pennadoù, skoroù, videoioù, podkastoù) ;
Bezañ evezhiek war ar c'heleier niverel ha mediatek.

4) Darvoudoù & mesenerezh

Kenurzhiañ kehentiñ an darvoudoù (gouelioù ar skolioù, sonadegoù, dorioù digor, koulzad profoù).
Sevel ar skoroù (follennoù-nij, skritelloù, lizhiri-kelaouiñ, kakemonoioù).
Talvoudekaat ar mesenerezh hag ar c'hevelerezhioù (kitoù profourien, kehentiñ arbennik).
Prederiañ war an ostilhoù dastum ha heuliañ (furmskridoù, koulzadoù).

5) Heuliañ & kenfurmded

Lakaat e pleustr titourennoù (web, rouedadoù sokial, brud er mediaoù).
Eveshaat ouzh ar c'henfurmded reoliek, dreist-holl war an RGPD.

Skiant-prenet ha barregezhioù goulennet

Brezhoneg dre gomz ha dre skrid (ret-holl).
Anavezout mat rouedad Diwan hag ar mont en-dro.
Diazezoù mat war c'hehentiñ & marketing niverel, merañ raktresoù.
Barrek war Google Workspace / Office hag ostilhoù graferezh (Canva, InDesign, Photoshop...).
Barrek-kenañ dre skrid ha dre gomz ; komz dirak an dud
Aozet mat, emren, oberiant war ar prim, aes gant an dud ha kaout diplomatiezh
Liesvarrek, spered krouiñ hag intrudu ; plijet gant al labour a-stroll.

Titouroù war ar post

Kevrat didermen leun amzer
Gopr hervez skiant-prenet ha barregezhioù an den
Monedoneoù ingal e Breizh ; bezañ dibres diouzh an noz ha d'an dibenn-sizhun a-wechoù.

Evit mont war ar renk, kas CV + lizher emginnig da : tuta@diwan.bzh a-raok an 28/09/2025

Sellout ouzh ar c'hinnig : <https://www.diwan.bzh/br/offres-emplois/charge-e-de-communication-120920252248>